

8N2-5-021

# CANTIC

EN HENOR DA

## ZANT SEBASTIAN

(Parres Tréméoc.)



DISKAN :

TON : Bale Arzur.

Dalc'hit d'ho feiz, tud Breiz-Izel,  
Seul vui ma rer dezi brezel  
O clasc diganeoc'h hé lemel.

1

Ra vo Doue en Env meulet  
Gant an oll zent a sentezet,  
Ra vo meulet gant an Elet.

2


Ra vo meulet var an douar,  
Gant mouez kement hini her c'här,  
Ac e peb leac'h, ac e peb mar.

3

Ra vo meulet Doue eleiz,  
Meulet da veza roet da Vreiz  
Da veza roet da Vreiz hé feiz.

4

Goude Doue, ra viot meulet  
Sant Sebastian beniget  
Hor Sant patron muia caret.



5

Guech all, sant bras en ho pue  
Eus peb clenvet o poa pare  
Dre ho peden a grac Doue.

6

Hor sant patron, evel guech all,  
Hirio c'hoas c'houi oar hon diouall  
Euz a beb droug, eus a beb goall.

7

Hor c'hendalc'hit dinec'h bepret  
Etouez birou an drouc-speret  
Goassoc'h vit re ar baiannet.

8

C'houi hon diouall euz ar c'hlenvet :  
Hon diouallit eus ar pec'het  
Goassa clenvet zo bars ar bed.

9

C'houi peus ar garg a bers Doue  
Ac euz hor c'borf ac hon ene :  
Salvit, salvit ho pugale !

10

En Env eun deiz, en ho kichen  
Mar domp salvet dre ho peden,  
O na bleünen, 'n ho curunen,

---

*Imprimatur :*

A. SERRÉ.

Avril 1882.

---

Quimper, impr., de l'Evêché.